

Garreg

(Toussaint René Marie Le Garrec) (Hollsent Reun Mari ar Garreg) (Ar Barner) Kergrist-Moelou 1862 - Montroulez 1939

Sant Gwennole, Mister brezoneg en tri akt.

Bet embannet e 1901.

Modernnaet eo bet an doare-skriva.

Traou iskiz, evid Breiz, a zo er pennadou diweza.

Sant Gwennole

C'hoarierien

Gradlon-Meur, roue Breiz.

Fregan, Gouarner Breiz.

Alba, gwreg Fregan.

Gwennole, Abad, mab Fregan hag Alba.

Budog, manah.

Mistral, floh Fregan.

Belflor, denjentil.

Riou, e vab, denjentil.

Dourva, denjentil.

Sterido, denjentil.

Nelson, denjentil.

Pikez, denjentil.

Roue Barbari.

Judara, e gannader.

Mantar, beleg fall.

Ismeneo, beleg mad.

Fardaz, mêzier.

Alanig, e vevel.

Marhared.

Eun ostizez.

Tri den ar bobl.

Akt kenta

(Eur zal e palez Fregan, en enezenn Vriad)

Pennad kenta

Fregan, Alba

(azezet o-daou)

Fregan

Ar mab-se deom, Alaba, 'vo sur eun den santel :
Din-me, deh diweza, 'n-esu roet eur gentel,
Ha n'ankounac'hain biken.

Alba

Souezuz e' !

Displeg din 'ta, Fregan, penaoz 'oa erru se ?

Fregan

'Toue, pa oam o vond da vanati Budog,
'Teuas eun tarz-kurun, gand eur strak hag eur stok,
Eur barrad glao ken puill, eun avel ken garo,
Ma seblante ganin geled Êl ar maro,
Astennet e ziouvreh d'or sacha d'ar bed all.
Gand ar boan hag ar spont e oan prest da yudal,
Hag e lavar is krenn e rankchem dond d'ar gêr.
Gwennole ne gomzas ouzin nemed eur ger,
E viz o tiskouez an Neñv : « Doue eo ar Mestr braz ! »
Kerkent euz ar houmoul an heol a zispakas,
Ha gand eur hwezadenn 'oa skubet an arne :
Neuze 'vad, ne oa ken kaoz an distro gane' :
Va beaj gand ar paotr a gasis tre d'ar penn ;
C'hoaz, pa oam peurrentet eno, 'rankis ouspenn,
A-raog distrei, goulenn e vennoz digantañ
Ha, pa zavas e zorn, eun Êl deuz ar c'hoantañ
'Welis en e gichenn, heñvel ouz an hini
En-devoa diouganet an oll draou-mañ deom-ni !

Alba

Trugarekaom Doue dimeuz e vadelez !

Eil pennad

Fregan, Alba, Budog, Gwennole)

(Gwennole, en oh antreal, ah a da vriata e vamm hag e dad.

Budog a stou e benn).

Alba

Va mabig Gwennole, va faotr muia-karet !

Fregan

Sell 'ta ! perag out deuet war da giz ken abred ?

Budog

Em zigaret¹, va friñs, ha c'hwi, priñsez, ivez :
Ho mab a zegasan deoh d'ar gêr a-nevez,
Abalamour, renet gand sklêrijenn an neñv,
A oar, en peb doare, kalz hirroh 'vidon-me.
Kaerroh zo, me houlenn bezañ sturiet gantañ,
Ha chom evel diskibl 'leh oan mestr da gentañ.
Hemañ 'vo Abostol santel ar wir gredenn ;
Rag e feiz 'zo ken kreñv, ken nerzuz e bedenn,
M'en-deus, 'vid an deiziou, du-mañ e vanati,
Yahaet garr eur bugel, torret e-kreiz c'hoari.
Dre levez e tle ho kalonou tridal,
P'hoh-eus eur mab merket gand Doue war e dal
'Vid an uhella karg ez eus dindan an Neñv.

Alba

Ra deuy ho komz, va zad, da vezañ gwirionez !

¹ Em zigaret ; Va digarezit.

Trede pennad

(*Ar memez re, Gradlon, Belflor, Riou, Dourva, Sterido,
Mistral ouspenn.*)

Mistral

(*en eur zaludi*)

An aotrou roue Breiz, Gradlon meur, 'zo amañ,
Ha pevar ezu e dud 'zo deuet ivez gantañ.

Gradlon

(*en eur zond tre gand ar pevar all*)

Deiz mad deoh, va henderv, ha deoh, priñsez Alba !
R'ho kendalho Doue en yhed hag en joa !

Fregan

Deiz mad deoh, va roue, kendirvi, marheien,
Va gwreg Alba ha me 'zo ho servijerien.

Gradlon

Ni 'zo deut da Vriad hirie d'ober eun dro,
Evid gweled ho mab, brudet-braz dre ar vro.

Fregan

Hemañ, kenderv Gradlon, eo mab Gwennole,
Hag e vestr, ar manah Budog, eo egile.
(*Gwennole ha Budog a zalud*).

Gradlon

(*En eur bokad da Wennole*)

Plijadur 'ra ganin, va niz, da anavezoud.

Belflor

(*En eur bokad dezañ ivez*)

Me 'zo tad braz ennon, pa welan ahanout,
Tosta amañ, Riou, da bokad d'az kenderv².

Riou

Gand dudi e rafen, mar galljen hen ober ;
Allaz ! trei 'ra va fenn, skorna 'ra va halon.
(*Koueza 'ra, maro*).

Belflor

(*En eur lammed war e vab*).

Setu maro va mab, reuzeuzdig zo ahanon !

Gradlon

(*O tostaad gand ar re all*)

Ya, siwaz ! tremenet eo ar paour-kêz Riou ;

² kenderv : redeo distaga : kender, evid ar rim.

Re vuan, evelkent, e tegouez gwalleuriou !

Belflor

(Troet etrezeg Gwennole).

O ! Gwennole, te 'zo gallouduz da bedenn,
Ped Doue, ma prizo terri va flanedenn !

Gwennole

Ar Mestr hepken a oar pe ar well pe ar waz³
'N em gavo va henderv o tond da vevañ c'hoaz.
Rag-se, peher dister, netra ken ne hallan
Nemed pedi Doue d'ober 'vid ar gwellañ.
*(Daoulina a ra da bedi, ha, goude eur pennadig, e lavar en
eur zevel
hag en eur ober sin ar groaz).*
Riou, sav alese, dre halloud an Aotro' !
(Riou a zav war e gomz).

Belflor

O burzud ar haerra ! bevet va mab en-dro !

Riou

Seblantoud a ra din distrei euz eur vro bell.

Belflor

Ar vro bell-ze, va faotr, eo e ano mervel,
Ha, mar 'teus bet an eur⁴ da zistrei a-geit-se,
Eo dre bedenn nerzuz da genderv Gwennole.

Riou

(En eur zevel, troet war-du Gwennole)

Mad ! keit ha ma vevin, me da heulio dre oll :
Rag war da roudou-te, den n'ay biken da goll.

Gradlon

Ha me 'ro a-nevez deoh-c'hwi, kenderv Fregan,
Ar galloud da sturia, en peuh 'vel en emgann,
Oll boblou Breiz-Izel ; gand eur mab sort ah-eus,
Ne vo gwelet netra dre Vreiz o vond a-dreuz.

Fregan

O ! va roue, c'hwi 'zo kalz re vad em heñver,
Mez n'ho-po mevel 'bed gwelloh 'vid ho kender'.

Gwennole

Va zad, dre hras Doue, a ray ar gevridi.
Rag me, va eontr, n'ouzon netra nemed pedi.

³ ar well pe ar waz : eun dra vad pe eun dra fall.

⁴ an eur : an eurvad.

Gradlon

Ar bedenn eo brasa galloud ‘zo er bed-mañ.

Mistral

(Goude bezañ sellet er-mêz)

Aotrounez, erru zo eur hannader ama[∞],
Hag eñ gwisket ‘n eur stumm sort na welis nemeur.

Gradlon

Lavar dezañ dond tre.

Pevare pennad

(Ar memez re, Judara ouspenn)

Judara

Me ho salud, Gradlon Meur :

Va roue ‘zo du-hont, kant mil zoudard gantañ ;
Hogen, prizet en-deus va degas da gantañ
‘Vid lavared deoh n’ho-po poan ebed da anduri
Mar anzavit da vestr ar roue Barbari.

Gradlon

Kê ‘lese, Morian, ha lavar d’az roue
Penaoz n’anavez Breiziz aotrou ‘bed ‘med Doue.

Judara

Me ‘h a kuit ; koulskoude taolit pled d’am lavar :
Kreñvoh ‘vid va roue n’eus ket war an douar,
Ha, pa vo kounnaret, vefoh re ziwevad
Da zacha beg ho fri ganeoh ‘raog ar flipad.

Gwennole

Doue ‘zalh en e zorn ar holl hag ar gounid :
Nerz an neñv ‘vo ganim, pa vo nerz tud ganit ;
‘Vid stourm ouz e Grouer, an den ‘o berr e vreh,
Hga hebdale ‘weli piou deuz oute ‘vo treh.

Judara

Eun dra ne welan ken : c’hoant hoh-eus kaoud brezel,
Hag emberr e ruillo ar gwad dre Vreiz-Izel.
(Julara ah a kuit).

Pemped pennad

(Ar memez re, nemed Judara)

Gradlon

Pebez taol nehamant !

Gwennole

Va eontr, bezit dineh :
Kredit mad e teuy dem eur zikour euz an neh,
Prientit ar viktor, Doue ‘beurechuo.

Gradlon

C’hwi ‘zo yaouank ha kreñv, Fergan, c’hwi gonduo
Va strollad d’an emgann ; an oad a vir ouzon
Da verad⁵ ar hleze, daoust da dan va halon.

Alba

Kê d’ar brezel eta, Fregan, va gwaz karet,
Ma vo gand ar hristen ar pagan diskaret.

Gwennole

It dispouren, va zad : ni, dre on pedennou,
A vo c’hoaz, hep skei taol, ho kwella divennou.

Fregan

(Briata ‘ra e wreg hag e vab, ha rei eun dornad d’ar roue).
O kuitaad ahanoh, ‘teu dour em daoulagad,
Hogen ne grenin ket e-kreiz tan an argad.

Mistral

Leh ‘ay ar mestr e tle ar mevel mond ive’ ;
Me ‘rank ober eur pred Morianed⁶ fete’.
(Oll ah a kuit, nemed Alba, Gradlon ha Gwennole).

C’hwehved pennad

(Alba, Gradlon, Gwennole (daoulinet o-zri)

Alba

Va Doue, pegen kriz eo soñjal er brezel !
Teurvezit, da vihanna, da Vreiziz rei skoazell.

Gradlon

Ho pezit soñj hirie, Mestr gallouduz an neñv,
Emañ bet a-viskoaz ho preh a-du ganen.

Gwennole

Harpit, aotrou Doue, gwir zoudarded ar feiz,
Na lezit ket an Diaoul da vezañ treh en Breiz.
(Sevel a reont).

Seizved pennad

(Ar memez re, Fregan hag ar roue Barbari ouspenn)

⁵ Da verad : d’ober gand.

⁶ Morianed : ? Marteze eur ger evid ober goap euz an dud.

Roue Barbari

Krog on zud eo koulz dem ivez kregi d'on daou.

Fregan

Deus eta pa giri, ma torrin da benn glaou⁷ !
(En em ganna a reont).

Roue Barbari

Jupiter, Meurz, Pluton, deuit bremañ d'am zikour,
Ha prestig e welfoh penn ar Breizad e-skourr⁸
En eun templ nevez-flamm 'zavin deoh e kêr-Iz.

⁷ da benn glaou : ober a ra goap.

⁸ e-skourr : a-istribill.

Eil Akt

(Eur blasenn euz ar gêr Iz)

Pennad kenta

(Gradlon, Mantar, Dourva, Sterido, Xelson)

Gradlon

(azezet 'n eur gador-vreh)

Ken eüruz ha bremañ 'oan ket bet evid c'hoaz.

Mantar

Ho pobl, roue Gradlon, 'lavar ivez biskoaz,
Dindan sklêrder an heol, en amzer roue 'bed,
N'ez eus gwelet pobl all ken eüruz dre ar bed.
Rag-ze, ho meulodi a red dre oll en Breiz,
P'hoh-eus degaset dem eur hiz nevez ken reiz,
Hag a hall pep hini ahanom heul e benn,
Heb bezañ hualet gand feiz na gand lezenn.

Gradlon

Eun tamm furnez a zo deut din da heul an oad,
Hag am-eus intentet lakaad dindan va zroad
Eur goz kredenn diod 'vel hini ar gristenien.

Mantar

Ha me, 'ta, 'oa gwechall e-touez ar veleien,
Pa welis ar skwer gaer roet gand va roue,
Hag e trois kein dioustu d'ar Pab ha da Zoue.

Dourva

Bremañ 'vad, 'h a an traou en-dro gand or bro-ni !
Kenavo d'ar⁹ glahar, d'ar haoñ¹⁰, d'ar velkoni !

Sterido

Bremañ an Doueou hag a dreuz hag a hed,
An eil 'zo 'vid ar gwin, eben¹¹ 'vid ar merhed.

Xelson

Me am-eus dibabet pell 'zo va daou baeron :
Plutus, Doue an aour, Merkur, tad al laeron.

Mantar

'Velkent, ne vo biken on labour peurachu,
Ken 'vo an ilizou tanfoelret en ludu,
Ha displantet gwrizioù ar Groaz euz on douar.

⁹ Kenavo d'ar : galleg.

¹⁰ d'ar haoñ : d'ar hañv.

¹¹ eben : eun Doueez.

Gradlon

Mad ! it ho-taou, Xelson ha Dourva : c'hwi a oar
Peleh kaoud sikour vad d'ober al labour-ze.
Eur mennoz brao, Mantar, hoh-eus-c'hwi bet aze !

Xelson ha Dourva

Ni 'zent gand plijadur ouzoh, roue Gradlon,
Hag a boanio on-daou deuz a greiz or halon.
(*Kuit eh eont*).

Gradlon

Daoust pesort lavaro Gwennole, va niz kêz,
Pa ouezo 'vo stlapet e Zoue koz er-mêz ?
Deuz a Landevenneg eo bet anvet abad,
Hga e tle dond amañ prestig, eñ hag e dad.

Eil pennad

(*Gradlon, Mantar, Fregan, Gwennole, Sterido*)

Gwennole

Deiz mad deoh, va roue ha va eontr war eun dro,
Me ho trugareka deuz ho madoberou.

Fregan

Ha me 'deu, va henderv, da lavared deoh
Penaoz 'mañ Breiz-Izel sort biskoaz en peoh.

Gradlon

Plijadur vraz 'ra din ho kweled amañ ho-taou,
Dre am-eus da zeski deoh forz tammigou¹² traou,
Ha n'oh ket en gortoz d'o hleved.

Gwennole

Marteze !

Teurvezit o displega, hag e welfom neuze.

Gradlon

Feiz, va niz, c'hoariet 'm-eus eun taol deuz va fenn :
Ho Krist hag ho Toue 'm-eus dilezet a-grenn.

Gwennole

Ha gwir, hoh-eus gallet ankouez ker buan all
Madeleziou Doue en ho keñver ?

Gradlon

Deut fall

Out hirie da brezeg ; rag me, gand Jupiter,
'N hini 'fell din bremañ lavared va fater.'

¹² tammigou : tammouigou.

Mantar

Souezuz eo, eun den gouizieg 'vel Gwennole
A lonk kontadennou mad evid bugale :
Misteriou dreist spered, poaniou kriz da viken
'Vid an disterra joa tañvaet kreiz an anken !
Gwelloc'h lagad 'n-eus bet or roue braz Gradlon,
O lezel pep hini da heul c'hoant e galon,
Ha da gutuill buan bleuniou ar blijadur,
Peogwir 'rankom, heb mar, distrei en breinadur.

Gwennole

Kaer az-tevo, Mantar, klask c'hoari da louarn,
Me 'wel indan da gaoz 'tispak penn ar skouarn :
Ne fell dit 'med an tu da heul da youlou fall.
Hogen, goude 'r bed-mañ, ranker mond d'ar bed all,
Leh 'yudo 'r re daonet 'hed ar beurbadelez,
Ha 'kano ar re vad gand Doue 'n e balez.

Mantar

Allaz ! deuz ar vro bell, a veulez dem ken kaer,
Ne zeu den war e giz da zegas keleier.
Eur had en dorn 'zo gwell evid kant o redeg.
Ha promesaou goullou 'zo nebeud talvoudeg.
Dalh eta da zae vrun, mar kerez pinijenn ;
Tra ma vin war ar bern, me ne yeunin biken.

Gwennole

Ar vuhez-mañ 'zo berr, eben ne echuo ket.

Gradlon

A-walh ho-taou ! bremañ e tleit kaoud sehed ;
Deut eta tre du-mañ, 'mom peb a dakenn win.

Mantar

Ho trugarez, me 'zo o hortoz eur mignon din.
(*Kuit eh eont, nemed Mantar*).

Trede pennad

Mantar

(*e-unan*)

Kaer 'm-eus gand al loa vraz rei dezañ, rei ha rei,
E welan ar paotr koz gand e niz prest da drei,
Ha, pa 'nevo lipet eun daou pe dri bannah,
E vo bountet dezañ e benn diod er zah.
Tud a glevan o tond : klaskom c'hweza an tan,
Ha gounid muioh-mui eneoù da Zatan.

Pevare pennad

(*Mantar, Fardaz, Alanig*)

Alanig

Bremañ, pa'z eo roet d'an oll al liberte,
Ma entent en da di bezañ ken mestr ha te ;
Bet eo ar vevelien zotoh evid leueou
Mez bremañ me 'vank din dalhen an alhweziou.

Fardaz

Neuze, te 'vo ar mestr, ha me 'vo ar mevel.

Alanig

Dirag an nerz eo red da beb gwanna tevel.
Setu Mantar, eun den euz re desketa :
Hemañ 'vo barner mad 'trezom on-daou, 'ket 'ta ?

Mantar

Ya, me 'lavaro deoh va zoñj, kuit interez :
Bet¹³ mevelien ho-taou, kemerit eur vestrez,
Eur plah yaouank sede, ha mad en peb gwele
Da domma treid an eil ha kalon egile ;
An alhweziou 'n he dorn, honnez a gendalho,
Gleb he muzell, leuniet ho kov, skañv ho yalho'.

Fardaz

Sed amañ 'n ali mad ! Plom a-walh, me anvez
Eur baotrez tuet brao, deuz ar flourra danvez,
Marhared heh ano.

Alanig

Feiz, din-me 'plij ivez ;
Na, hi, karoud a ray he mevelien nevez ?

Mantar

War ze bezit dineh : pa vez kaer ar gaoued,
Lapous da zond e-barz a vez buan kavet.

Fardaz

Ho trugarez ! me 'h a da gaoud Marharedig.

Alanig

Deom, kazel ouz kazel, da wel'd on haredig.
(*Kuit o-daou*).

Pemped pennad

Mantar, Dourva, Sterido, Xelson, ha goude Pikez).

Dourva

¹³ Bet : Bezit.

Te 'n hini 'oam o klask eun hanter-devez 'zo,
Doktor ar c'hoari-kêr, tad ar farserezo' :
Rag te a zesko dem an doare fentusa
Da gemer plijadur diwar goust on nesa.

Mantar

Greet eo ganeoh ar pezh a gemenn ar roue ?
Abaoe hoh-eus gallet terri e houeg da Zoue ?

Xelson

Ya, ya : lakaet on-eus eur bern tud d'hen ober,
Ha kerkent om deut kuit ; rag ar vuhez 'zo berr.

Sterido

Gwir zur e lavarez : sachom war on krohenn
Kait ha vo war on kein, goude ne rafom ken.

Pikez

(oh errued d'ar red)

Kavet e' ar ganfarded ; me 'oa dalhet war-lerh
Da brena 'r gontell-mañ, 'zo lemm, ha koant ha gwerh.

Mantar

Forz pegen lemm ha koant, n'oufe ket bezañ mad...
Ken a vo bet 'n eur hov bennag oh eva gwad.

Pikez

Gwelom ha te 'lar gwir ? *(Laza a ra Kelson).*

Ya, mad krag e' 'n doare

Evid boullaad an dud, pa'z int hanter re.

Gwelom c'hoaz ? *(Laza a ra Sterido).*

Kerkoulz all : skubet int hebdale,

Kalz 'vo frankoh ar strêd dem on-tri da vale.

Mantar

Diwallom ouz ar re a zoug kontellou lemm :
Ragn pa vez reud o breh, ar re-ze a wallflemm.

Dourva

Te, Pikez, n'eo ket brao bezañ dit amezeg.

Pikez

Deus atao ! troom i diwar hent ar hezeg.

Mantar

Diskar loen 'zo gwasoh pehed 'vid laza den.
N'hallom ket mond ahann heb eun tamm c'hoar zadenn
War an daou gêzig-mañ, 'kreiz ma soñjent c'hoari,
A zo kouezet ken brao en Ivern war o fri.
Ra vefont koaniet mad gand Pluton goz emberr !

Eom ! a-raog adarre ! pep kaerra ‘chom d’ober.

C’hwehved pennad

(Ar memez re, Fardaz, Alanig, Marhared ouspenn (kazellet o-zri).

Fardaz

An alhwez-se a vo dit d’ober ‘vel a giri,
Ha me ‘gred e refom tiegez mad on-tri.

Alanig

Me ‘gred ivez ; plijoud ‘ra din daoualgad glaz.
Hogen me ‘wel o tond amañ tri aotrou braz.
Deiz mad deoh, aotrounez !

Fardaz

Aotrounez, m’ho salud !

Mantar

Ar bolezig-mañ ‘zo re vrao ‘vid da goz klud ;
Mar bez rannet ‘trezoh, e vo moan peb lodenn.

Alanig

Bern ‘zo dit¹⁴ a be du e taolfom on skodenn ?
Jentil mad eh eo deut ar baotred ganem-ni ;
He miroud a refom, forz petra ‘gemenni.

Dourva

Gwelom an dimezell, pesort e lavaro ?

Marhared

Urz en-deus pep hini d’ober ‘vel ma karo,
Pa ren al liberte.

Pikez

Neuze ‘meum urz eta
Da gas ‘hanout ganem, pa mom o verhata ?
(Tostaad a ra da bokad dezi).
Ar sort-mañ n’ouzont ket pegement e talvez
Eun teñzor ken dispar, eun heveleb danvez.
(Kregi a ra en he breh d’he has gantañ, Alaing ro dezañ eun taol bount).

Te ‘vad a vo desket da vountañ warnon-me !
(Hen laza ‘ra).

Ha d’ar poatr kozs, greet ‘vo eun toull-bouton ivez’ ?

Marhared

Mar kerez, peogwir ‘mañ e alhwez em godell.

¹⁴ Bern ‘zo dit : n’eus forz.

Pikez

Houmañ 'vad, eh eo deuet he harr 'mêz ar zodell,
Hag, o wel'd eur spered ken lemm 'n eur horv ken koant,
Eo kresket war eun dro va eurvad ha va hoant.
Kê buan 'ta, Fardaz, red war-lerh da vevel.
(Laza 'ra Fardaz, ha pokad a-nevez da Varhared).
A-raog am vo barreg an daou-mañ da zevel,
Ni 'vo bet meur a wech o kousked asamblez.

Mantar

Gwel a rez, Marhared, pegen braz madeledz
'N-eus bet an aotrou-mañ o kas diwar da hent
Daou benn ken divalo, daou spered ken difent.

Dourva

A-raog kuitaad ahann, stagom-i ken ouz kein
Ma chomfont unanet ken a vefont peurvrein.
(O staga 'reont).

Marhared

Evel-sed Alanig a vo skwer vad d'ar vro
O chom feal d'e vestr zoken goude 'r maro.

Mantar

Bremañ, diwar o fenn pa'z om krenn dinehet,
Baleom on-pevar gand hent-praz ar pehed !

Trede akt

(Ar memez plasenn euz ar gêr-Iz)

Pennad kenta

(Gradlon, Gwennole)

Gwennole

Laret ‘m-oa deoh, va eontr, rankfeh dond war ho kiz,
Ha distrei hebdale da feiz hoh yaouankiz.

Gradlon

Gwir e oa da lavar ; ‘baoe ‘mañ torret o roll
Eo deut va zujidi heñvel ouz loened foll ;
Dre gêr-Iz ne glever ken kao nemed laerez,
Dizamm bugaligou, lahadeg, gwallerez ;
Biken ‘mije kredet, ‘nez e welan fete’
Nag a dorfejou ‘reer en ano ‘l Liberte !

Gwennole

Mantar, ar beleg all, eo pennkirieg an droug :
Kalz gweloh ‘vid hennez ‘zo bet kaset d’ar groug ;
‘Rag e zremm villiget an oll dud vad a gren,
Hag an Diaoul e-unan ‘dle bezañ deuz e ren.

Gradlon

Ma ‘mije bet niver a-walh a archerien,
Mantar a oa pell ‘zo ‘tre daouarn bourrevien ;
Mez troet eo gantañ bete va zoudarded,
Ha ne van ganin ken ‘med eun dornad gwarded.

Gwennole

An nerz ne ziouerfe netra, roue Gradlon,
Leh eo dall ar spered ha klañv-brein ar galon :
Dre hras Doue hepken eh hallfont para,
Gand ma n’erruo ket, siwaz ! re ziwevad !
Greom eur brezegenn dre gêr Iz,c’hwi ha me ;
Ma teu on zro da vad, ‘tigounnaro an neñv.

Gradlon

Ya, peogwir ar skwer fall d’an oll am-eus roet,
Dirag an oll ‘tlean diskouez ‘m-oa distroet.

Eil pennad

*(Ar memez re, Mantar, Dourva, Pikez ; Marhared,
tri den ar bobl ouspenn).*

Mantar

Saludom Gradlon Meur, on roue galouduz,
‘N-eus degaset en Breiz eur hiz ken talvouduz :

Rag,ma'z om-ni bremañ dishual o vale,
Dezañ om dleourien ; n'eo ket da Wennole.

Gradlon

Mez ha keuz a deu din pa glevan o veuli
Ar falla tra 'm-eus greet biskoaz dre droug ali.
Dianzav krenn a ran ar pennad follente'
A grogas em spered dre da guzuliou-te ;
A uhel vouez hirie rankan azlavared
N'eus Doue gwir ebed 'med hini Nazareth.

Mantar

Ne glaskin ket miroud eur roue Breiz-Izel
Da drei en-dro, pa gar, evel eru gornigell ;
Ar memez liberte eo mad din rei dezañ
Evel a reas dem e lezenn diweza ;
Hogen,pa dro 'r horoll deuz va hiz, re vuan,
Me a deu berr warnon, hag a houl chom d'ehan.

Gwennole

Trmenet eo, pelloh, koulz ar farserez,
Ha ganit-te, Mantar, eo skuiz Doue pell 'zo ;
Dreist muzul eo savet torfejou ar gêr-mañ ;
Rag-se, a-berz Doue 'm-on degaset bremañ
Evid klask, eur wech c'hoaz, savetei ar gêr Iz.
(Gweled a ran, gwasoh karg biskoaz ne gemeris).

Mantar

Diêz sur e vo dit on lakaad da gredi
'Nije roet Doue dit-te ar gevridi
Da zond da ziougana gwalleuriou d'an dud all !
Gra nebeutoh a hoap ouzom, pa n'om ket dall.
Mar vijde eun Doue bennag, evel n'eus ket,
N'eo ket kredabl e ve keid all zo o kousked.

Gwennole

Amzer a-walh en-deus an Doue peurbaduz ;
Hogen, a glev re oll a voueziou hirvouduz
Pa ham beteg e dron ar gwad dinamm war red,
Doue 'zav, evelkent, e zorn da skei arbed !

Mantar

Ne gav ket deoh, va zad, eo hemañ eur paotr tomm
Hag em dennfe mad e eun, war teatr en Rom ?
Amañ 'vad ne dalvez netra ar c'hoari-fent,
Pa n'eus ket a dud flour a-walh evid entent ;
Ni anavez kalz reisoù pegen mad eo ar gwin,
Pegen kuñv eun tamm pok war muzellou lirzin.

Pikez

Koulz eo dit mond leh all da stigma da bechou,
Ni 'ra mil fouter-kaer dimeuz da rebechou.

Gwennole

(skoulmet e zaouarn evid pedi)

Va Doue, me ho ped, roit nerz d'am homziou,
Pa'z int oll peurdallet gand an drougsperejou !
Deuz hoh eneoù paour m'hoh-eus eun tamm, true',
Distroit, va breudeur, distroit da Zoue !

Mantar

Sell 'ta, pegen brao penn, pa n'n em laka da bedi !
O ! 'vid mond da biñter¹⁵ mar 'mije greet studi,
Ma 'm-oa kavet dioustu danvez eun daolenn gaer.

Dourva

Kee, gand da gaoziou plad, da wel'd he am 'zo 'r gêr.

Gwennole

(war an ton gourdrouz)

Tri deiz 'ro Doue deoh 'vid ober pinijenn,
Ha sevel ho sellou 'trezeg ar sklêrijenn ;
Goude, ma ne rit van, an traou-mañ 'vo gwelet ;
Ar mor, ar mor spontuz a lonko 'n e oueled
Kêr Iz hag he zouriou, he zud hag he zier,
Ha kement tra 'zo beo diabarz he ferzier¹⁶ ;
An drouz a zav outi 'varvo da virviken,
Ar mor, servijer braz eun Doue kounnaret,
War gorre tud varo !

Mantar

(gand e vouez an domma)

Evel-se bezet greet !

(Oll e c'hoarzhont, nemed Gradlon ha Gwennole).

Dourva

Bremañ, p'eo goneet ganit da bemp gwenneg,
Kê, lez 'hanom didrouz d'ober on hoarzag.

Gwennole

Gwel'd a rit, va eontr paour, pesort pennou kaled :
Ho-pet truez, Jezuz, ouz peherien dallet !
(Kuit o-daou, hag an tri den euz ar bobl).

Trede pennad

(Mantar, Pikez, Dourva, Marhared, eun ostizez)

Pikez

¹⁵ da biñter : da livour.

¹⁶ he ferzier : he doriou.

Poent e oa deze mond kuit : erru ‘oa tomm va forn.
Prestig ‘vije lammet va hontell euz va dorn.

Marhared

Me ne greden ket komz e-pad ma oant aze,
Mez c’hoant c’hoarzin am-oa kenañ gand Gwennole.

Mantar

Lezom an daou vleup-se da zrailla koz-kaoziou,
H adeuz ar blijadur ‘houlom ar gwir roudou.
Klev ‘ta, ostizez koant, diskouez da zremm amañ,
Hast buan degas dem peadra da dommañ.
(*An ostizez a zispak*)

An ostizez

Bezañ zo gwin ha jistr, hini kreñv, chufere :
Mar fell deoh o zañvad, lavarit din pere.

Dourva

Ro da bevar evach, gand kartou da hoari,
Silzig, gwastell, krampouez, ha kig-sall da zebri.
(*An ostizez a zegas eun daol gwarniset*).

Mantar

Mad ! Evom pep hini deuz ar pezh a garo,
Evom d’ar blijadur, d’ar vuhez, d’ar maro,
Ha d’an ostizez vrao a zervich ken laouen !
(*Eva ‘reont, goude steki ar gwer*)

Pikez

Bremañ ‘h eom da gana beb eil eur ganaouenn .
(*Kana ‘ra, war don : an hini goz*)

Me ‘gar dreist-oll va Margodig,
Glaz he lagad, ruz he jodig ;
Margorog koant
Mistr ha drant
Eo va hoant.

Mantar

Me ‘gar ar gwin, gwad ar winienn,
A lak tan e peb gwazienn ;
Tommdar ar gwin,
Ruz, lirin
Tommdar ar gwin
A blij din.

Dourva

Me ‘blij din ar jistr brezoneg¹⁷,
A zegas an dud kaloneg ;

¹⁷ ar jistr brezoneg : b rezoeng n’eo nemed ar yez.

Me 'gar mond treuz
Ha didreuz,
Me 'gar mond treuz
Jistr em hreuz.

Marhared

Med n'oufen ket lavared
Pesort 'm-eus ar muia karet :
'N hini 'garan
'Vid bremañ
'N hini 'garan (*o tiskouez Pikez*)
Eo hemañ.

Greom c'hoaz, mar keret, eru pennadig koroll,
'Vid ma vefom emberr muioh lik ha diroll.
Eur biniou hag eur vombard a zon eun dro-dañs.

Pikez

Dem 'ta, beh d'an ebat pa drouz ar zonerien !

Dourva

Me n'in ket : em diouharr zo krog eur stal verien.
(*Chom a ra kousket ouz an daol*)

Marhared

Me 'm-eus ezomm ivez d'ober eun tamm ehan.
(*Kousked a ra*).

Mantar

Biskoaz gwir Vreizadez ne gouskas heh-unan.
(*Kousked a ra*).

Pikez

Bremazon or-pevar e kan fom eru zon all.
(*Gourvezoud a ra ouz an daol, haf en em lakaont oll da zorohal*) ?

Pevare pennad

(An noz a zo deuet a-dammou, Gradlon hag Ismenef a zispak e goueled an teatr).

Gradlon

Tostaad a ra an eur : erru eo noz teñval.
Evid an deirved gwech pa glevfom kan ar hog,
‘Vo poent braz dem on-daou mond war varh, hag a-raog !
Dreist-oll, diwallom piz da zelled ‘dreñv on kein,
Anez ‘vefom dustu troet en skeudou mein :
‘Vel-se emañ gourhemennou va biz sant Gwennole,
Senti ‘rankom outañ,pe mervel hebdale.

Ismene

Me ‘vo aketuz da zenti, roue Gradlon.

Gradlon

Allaz ! Ismene, ranna ‘ra va halon
O soñjal ‘vo kollet emberr, eet da netra,
Ouspenn kant-mil a dud, eur gêr deuz ar gaerra !

Gwennole

(oh erruoud a-daol)

Degasit din ho torn, va eontr, ha deuet gane’ ;
O hortoz en-kichenn emañ va inkane.
(‘Kreiz an teatr e tiskenn tamm-htamm gand taol hag ar pevar ever)

Marhared

Va Doue, setu-me maro !

Pikez

Serr da henou !

Bremazon ti an Diaoul ‘larfom or pedennou.

Mantar

Erru eo an diwez : treh out, paotr Galile !
Malloz da Hradlon koz, malloz da Wennole
(Lonket int oll)

Gwennole

(Gradlon hag eñ e toull an nor, prest da vond er-mêz)

Maro int oll, ar re ‘deus greet warnoh dispriz :
Pardonit,va Doue, da beherein gêr-Iz !
Ha ni, roue Gradlon, da virviken ‘n o hreiz,
Mirom feiz da Zoue, ha karantez da Vreiz !